


# Merkoù istorel pennañ studiet er skolaj

## Merkoù istorel er 6<sup>vet</sup> klas

Marevezh	Merkoù	Displegadenn
III <sup>e</sup> milved kent J.-K.	Sevenadurezhioù kentañ	Deroù ar skritur e Mezopotamia hag en Egipt ha deroù ar Stadoù kentañ.
VIII <sup>vet</sup> kantved kent J.-K.	• Homeros	Barzh gresian en dije savet an <i>Ilias</i> hag an <i>Odiseia</i> , barzhonegoù o komz eus kredennoù ar C'hresianed.
	• Savidigezh Roma	Hervez ar vojenn e vije bet savet ar geoded gant Romulus. Hervez an arkeologiezh e vije bet savet gant ar pobloù latin hag etrusk.
	• Deroù ar Bibl dre skrid	Levr sakr an Hebreed, diazez relijion ar Yuzevien, ar relijion undoue kentañ.
V <sup>vet</sup> kantved kent J.-K.	Perikles	Den-meur e penn keoded Atena, reiñ a ra muioc'h a nerzh d'an demokratelezh.
52 kent J.-K.	Verkingetoriks trec'het gant Kaezar en Alesia	Aloubidigezh Galia gant ar Romaned.
I <sup>añ</sup> kantved	Deroù ar gristeniezh	Relijion undoue prezeget e Palestina gant ar profed Jezus ha skignet en impalaeriezh roman gant e ebstel.
I <sup>añ</sup> hag eil kantvedoù	« Pax romana »	Marevezh stabilded hag a berzh-mat en impaleriezh roman.
800	Kurunidigezh Karl Veur	Roue ar Franked, kurunet impalaer ar C'hornôg gant ar pab Leon III <sup>e</sup> .




## Merkoù istorel er 5<sup>vet</sup> klas

Marevezh	Merkoù	Displegadenn
622	an Hejir	Mahomed, profed ur relijion undoue nevez en Arabia : an islam. Disparti eus Mekka evit Medina ha deroù an deiziadur muzulman.
X <sup>vet</sup> -XII <sup>vet</sup> kantved	Oadvezh an ilizoù roman	En Europa, er C'hornôg kristen e saver muioc'h-mui a ilizoù, an arkitektouriezh anezho o heuliañ hini ar Romaned.
1096-1099	Brezel ar Groaz kentañ	Galvet e vez kristenien ar C'hornôg gant ar pab Urban an eil da vrezeliñ a-enep muzulmiz. Aloubet e vez Jeruzalem gante hag e Palestina e vez savet gante Stadoù latin ar Reter.
XII <sup>vet</sup> -XV <sup>vet</sup> kantved	Oadvezh an ilizoù gotek	E kêrioù ar C'hornôg e vez savet ilizoù-meur hervez teknikoù nevez an arkitektour.
1492	Beaj kentañ Kristof Goulm	Beaj vras kentañ en-dro d'ar bed. E servij ar roue Spagn en deus Kristof Goulm c'hoant da dizhout Azia dre ar meurvor Atlantel. E gwirionez e tilestr war un tamm douar diana-vez, lesanvet Amerika.
XV <sup>vet</sup> -XVI <sup>vet</sup> kantved	An Azginivelezh	Marevezh azginivelezh ar speredoù hag an arz en Europa : sell nevez ouzh mab-den hag ar bed. Ul lusk a vez roet d'al livadur, d'an arkitektouriezh, ha d'ar skultañ, awenet gant arz an Henamzer.
1598	Edit Naoned	Edit Naoned gant ar roue Herri IV evit paouez gant ar brezelioù relijiel etre katoliked ha protestanted. Ar relijion ofisiel eo ar gatologiezh, met ar brotestanted a c'hall heuliañ o reolenn.
1661-1715	Loeiz XIV, Versailles	N'eus nemet ur roue o ren e Bro-C'hall e-barzh ar savadur en deus lakaet ober, kastell Versailles, Loeiz XIV, ar roue hollc'halloudek.






# Merkoù istorel evit ar 4<sup>e</sup> klas

Marevezh	Merkoù	Displegadenn
Kreiz an XVIII <sup>vet</sup> kantved	<i>L'Encyclopédie</i>	« Dictionnaire raisonné des sciences, des arts et des métiers » dindan renerezh Diderot ha d'Alembert. Embannet en Europa e marevezh ar Sklêrijenn.
1789-1799	An Dispac'h bras	<ul style="list-style-type: none"> <li>D'ar 14<sup>vet</sup> a viz Gouere 1789 : argad ar Bastille Toull-bac'h aloubet gant ar Barizianed. Darvoud o tiskouez trec'h ar frankiz war ar vonarkiezh.</li> <li>Miz Eost 1789 : Disklêriadur gwirioù mab-den hag ar sitoianed Testenn bouezusañ renad politikel nevez Bro-C'hall. Awenet eo gant spered ar Sklêrijenn.</li> <li>Miz Gwengolo 1792 : savidigezh ar Republik Dilennidi ar Vodadenn a c'houlenn ur renad politikel nevez e-lec'h ma ne vez ket tremenet ar galloud a dad da vab : ar Republik.</li> </ul>
1799-1815	Ar C'hoñsulad hag an Impalaeriezh	E 1799 e kemer Bonaparte ar galloud. Savet e vez gantañ ur renad politikel kreñv : ar C'hoñsulad a zeu da vezañ an Impalaeriezh. E 1804 e teu Bonaparte da vezañ Napoleon kentañ, impalaer ar C'hallaoued.
1815	Kendalc'h Vienna	Kendalc'h o vodañ pennoù-bras Europa, trec'h war Napoleon kentañ. Rannañ a reont etrezo an tiriadoù adkemeret digant Bro-C'hall ha lakaat a reont en-dro an urzh kozh en Europa.
1815-1848	Ar vonarkiezh vonreizhel	Goude diskar Napoleon kentañ e teu en-dro ar « vonarkiezh vonreizhel » e Bro-C'hall war anv Loeiz XVIII. Ar re a zeuio war e lerc'h, Charles X ha Loeiz-Fulup, a vo diskaret an eil gant Dispac'h 1830, egile gant hini 1848.
1848-1852	An Eil Republik	<ul style="list-style-type: none"> <li>Savidigezh ar Republik da heul dispac'h 1848.</li> <li>1848 : ar gwir da votiñ evit an holl wazed ouzhpenn 21 bloaz.</li> <li>Torret ar sklavelezh e trevadenoù Bro-C'hall.</li> </ul>
1852-1870	An Eil Impalaeriezh	Gant un taol-Stad e kemer Loeiz-Napoleon Bonaparte ar galloud ha lakaat a ra neuze un termen d'an Eil Republik. Adsevel a ra an Impalaeriezh ha dont a ra da vezañ Napoleon III. E 1870, diskar an Impalaeriezh a ya da heul e zrouklamm e Prusia.
1870-1940	An III <sup>e</sup> Republik	Savet ar Republik goude drouklamm Napoleon III. Kreñvaet e vez ar frankiz hag an ingalded gant renad bonreizhel ar Republik.
1882	Jules Ferry hag ar skolioù laik, frank ha ret	Savet e vez gant Jules Ferry ar skolioù republikan : frank laik ha ret etre 6 ha 13 vloaz.
1894-1906	An afer Dreyfus	Reuz bras o lakaat diouzh un tu ar virourien a damall e drubarderezh d'ar c'habiten Dreyfus ha diouzh an tu all difennourien gwirioù mab-den o reiñ skoazell dezhañ. Didamallet eo bet Dreyfus e fin ar gont, ha kreñvaet ar Republik hag an demokratelezh.
1905	Lezenn an disrann etre an Ilizoù hag ar Stad	Pal diazez ar Republik o ren c'hoazh hiziv an deiz eo al laikelezh. Chom a ra ar Stad neptu e-keñver ar relijionoù a sell ouzh ar vuhez prevez, gwarantet gant ar frankiz da soñjal, yalc'had ebet digant ar Stad evit an Ilizoù.



# Merkoù istorel en 3<sup>e</sup> klas

Marevezh	Merkoù	Displegadenn
1914-1918	Brezel-bed kentañ	Brezel o tiskouez ar feulster a-vras : brezel ar foziou-difenn, feulster a-enep ar sivilied (gouennlazh an Armenianed).
1916	Emgann Verdun	Alamaned o tagañ Bro-C'hall war dalbenn ar c'hornôg. Arouez ur brezel war bep tachenn eo Verdun : brezel ar foziou-difenn, brezel an industriezh, al linennoù a-dreñv kaset d'an talbenn, kalz a dud lazhet pe gloazet.
1917	Dispac'h Rusia	Taol-Stad bolchevik prientet gant Lenin ha Trotski. E Rusia ez eus savet ur renad komunour gant Lenin, an hini kentañ en istor.
11 a viz Du 1918	Harz-brezel ar Brezel bras	Sinet ez eus bet un harz-brezel etre Frañs hag Alamagn, o lakaat un termen d'ar Brezel bras.
1924-1953	Stalin e penn ar Stad	War-lerc'h Lenin e penn an URSS e teu Stalin. Boutinelaat a ra an holl zouaroù ha sevel a ra ur renad totalitaer.
1933-1945	Hitler e penn ar Stad	Renner ar strollad nazi. Savet e vez gantañ ur renad totalitaer savet war azeuladur ar pennrenner, ar ouenn arian dreist d'ar re all, an enep-yuzevouriezh, hag aloubidigezh al <i>Lebensraum</i> . Da heul e tarzho an Eil Brezel-bed.
1936	Trec'h en dilennadegoù ha lezennoù sokial gant Talbenn ar bobl	Mont a ra an demokratelezh sokial war-raok gant muzulioù gouarnamant Talbenn ar bobl : gwirioù evit ar sindikadoù, sizhunvezh an 40 eurvezh, 14 devezh koñjeoù gopret.
1939-1945	Eil Brezel-bed	Brezel spontus. Kemer a ra perzh ennañ an holl gevandirioù. Spontus eo niver an dud lazhet (50 milion a dud lazhet, gouennlazh ar Yuzevien hag ar Tsiganed). D'an 8 a viz Mae 1945 ez eus bet lakaet un termen gant Alamagn oc'h en em rentañ, hag e miz Eost 1945 gant Bro-Japan o kapituliñ goude tarzhadennoù ar bombezennoù atomek war Hiroshima ha Nagasaki.
18 a viz Mezheven 1940	Galv ar jeneral de Gaulle	Penn-kentañ ar Rezistañs. E Radio Londrez e c'houlenn de Gaulle digant ar C'hallaoued nac'hañ an harz-brezel kinniget gant Pétain.
1940-1944	Renad Vichy	Gant ar marichal Pétain ez eus bet diazezet ur renad totalitaer o kenlabourat gant Alamagn nazi.



Marevezh	Merkoù	Displegadenn
1944-1945	• Dieubidigezh Bro-C'hall	Dieubet eo ar vro gant an armeoù kevredet o tilestrañ e Bro-C'hall ha gant ar Rezistañs diabarzh.
	• Adsavidigezh ar Republik (ar IV <sup>e</sup> )	Savet eo en-dro ar Republik gant ar gouarnamant da-c'hortoz. Mont a ra an demokratelezh war-raok : ar merc'hed o deus ar gwir da votiñ (1944), Surentez sokial evit an holl (1945)
1947-1962	Marevezh pennañ an didrevadenniñ	Dieubet e vez an darn vrasañ eus trevadenoù ar broioù europat, pe dre genemglev (India), pe dre vrezel (Aljeria).
1961-1989	Moger Berlin	• 1961 : Brezel yen. Savet ez eus bet ur voger gant an RDA (skoazellet gant an URSS) o tistrannañ Berlin ar C'hornôg (RFA), hag o virout ouzh Alamaned ar Reter da vont da Alamagn ar C'hornôg (skoazellet gant ar Stadoù-Unanet).
		• 1989 : moger Berlin kaset d'an traoñ gant Berliniz ar Reter. Fin ar Brezel yen.
1957	Feurioù-emglev Roma	Sinet e 1957 gant c'hwec'h Stad eus Europa. Savet eo bet ganto ar KEE (Kumuniezh ekonomikel Europa).
1958-1969	Bloavezhioù de Gaulle	E 1958 e tistro ar jeneral de Gaulle e penn ar Stad. Sevel a ra ar V <sup>vet</sup> Republik. Ur galloud kreñvoc'h en deus prezidant ar Republik hervez ar Vonreizh.
1981-1995	Bloavezhioù Mitterrand	Evit ar wech kentañ er V <sup>vet</sup> Republik emañ an tu-kleiz e penn ar galloud. Da heul ar pebeilañ politikel e vo daou gengouarn.
1992	Feur-emglev Maastricht	Gantañ eo bet savet Unaniezh Europa (27 Stad enni e 2012). Marc'had bras e-lec'h ma c'hall mont ha dont e-barzh en o frankiz ar varc'hadourezh, ar servijoù hag an dud. Europiz eo keodedourien ar Stadoù zo enni.
1995-2007	Bloavezhioù Chirac	Distreiñ a ra an tu dehoù d'ar galloud. Goude an dilennadegoù eo anvet Jacques Chirac da brezidant ar Republik, met ret eo dezhañ kenvevañ gant an tu kleiz e-pad pemp bloaz.
2002	An euro, moneiz Europa	E 17 Stad eus an UE (Frañs en o zouez) e vez dilezet ar moneiz broadel evit an euro.

